

HEKLEV SEVENADUREL

	A-dreuz lenn	2
	Petra nevez ?	6
	Kelaouennoù	15
	Notennoù	25

Herve LATIMIER

La jeune fille et la mère,
gant Leïla Marouane,
Le Seuil, 2005,
180 pajenn, 5, 50€



Diaes eo chom hep soñjal e levr Souad Devet ez vev bet troet gant Daniel Kernalegen hag embannet gant *Al Lanv* e 2013 pa lenner *La jeune fille et la mère*. Memes sorc'henn a-zivout ar rev ha gwerc'hted ar merc'hed, memes darempredoù kriz ha mougus en tiegezhioù, memes emzalc'h a-berzh ar

merc'hed o sikour da waskañ an hini a zegas “an dizenor”, memes feulster... Un diforc'h a-bouez : ur romant eo daoust ma tle bezañ diazezet war fedoù bet bevet. Un nebeud diforc'hioù all : tremen a ra an traoù en Aljeria ha n'eo ket e Palestina, kemeret he deus perzh mamm Djamila er brezel-dieubiñ, war


an dachenn emgann. Tud digor a spered (ar skolaerez, ar barner hag e familh) a vev en oaziz. Kaoz a zo eus heñvelreviadezh pa glasker eurediñ Djamilia gant mab ur familh pinvidik. Sikouret eo Djamilia gant he breudeur hag hec'h eontred hag echuiñ a ra an istor war ur santad a spi...

Pouezus eo plas ar merc'hed en istor ha dedennus tudenn mamm Djamilia. Diskaret eo bet gant disorc'hoù ar brezel, c'hoant he deus gwelout he merc'h o seveniñ he hunvreoù bet

moustret. Krisoc'h a se eo ganti ur wech degaset an "dizenor" er familh. Emzalc'h ar c'hoar flatoul ha hini gwrac'hed "fur" ar gêriadenn a zo arouezius eus stad ar merc'hed er gevredigezh.

Skrivet mat eo al levr ha lenn ar reer anezhañ buan. Un testeni eo a-zivout kevredigezh Aljeria goude an dieubidigezh. Danvez preder a zegas. Ur stourm diazez evit denelaat ar bed eo stourm ar merc'hed evit gounit o flas reizh ennañ. Pegen start eo !

Les Identités meurtrières,
gant Amin Maalouf,
Grasset/Le livre de poche,
2004,
192 pajenn, 4€



Hegazus eo titl levr Amin Maalouf rak ne ziskouez ket arlivioù preder an aozer. Lavarout a ra (p.165) en doa c'hoant ouzhpennañ d'an titl "ou comment apprivoiser la panthère". Gwelloc'h e vefe bet. Rak hervezañ, n'eo dañjerus an

indentelezhioù nemet pa lezer anezho disuj betek re.

Peder lodenn a gaver en arnodskrid : *Mon identité, mes appartenances ; Quand la modernité vient de chez l'Autre ; Le temps des tribus planétaires ; Apprivoiser la panthère.*

El lodenn gentañ ez eus prederadennoù dedennus diwar-benn an doare ma sav pep hini ac'ha-nomp e identelezh adalek perzhourezhioù¹ niverus. Perzhiad eo pep hinienn e meur a strollad a-bep seurt. Kregiñ a ra an traoù da drenkañ pa vez termenet an hinienn dre ur berzhourezh nemetken.

An eil lodenn a bled dreist-holl gant ar bed “arab”. Dedennus eo evezhiadennoù Amin Maalouf peogwir ez eo arab e-unan met kristen melkit libanat. Komz a ra en un doare digor eus un danvez anavezet mat gantañ.

En trede lodenn e lenner prederadennoù a-zivout emdroadur ar bed, ar bedelaat, an araokadennoù teknologel herrekoc'h-herrekañ, an ezhomm reizh a identelezh krouet gant ar c'hemmoù-se. Evit skarzhañ ar riskloù a vrezel, a drelaterezh, a sponterezh e tleer kavout ur stumm da respont d'an ezhomm-se.

El lodenn ziwezhañ e pouez Amin Maalouf war an ezhomm a zoujañs evit pep hini ha pep sevenadur, war al liested sevenadurel en arvar, war liested ar yezhoù en arvar ivez. Kalzik


pajennadoù a zo goustelet d'ar yezhoù el lodenn-mañ ha kavout a reer enne evezhiadennoù talvoudus.

Domaj eo n'en dije ket studiet a dostoc'h ar “model gall” rak kavet en dije e Frañs ur skouer eus an identelezh vroadelour “lazherez” a gomz diwar he fenn. 'M eus aon e chomfe evel kalz tud un tamm touellet gant ar prezegennoù ideologel o veuliñ perzhioù mesiazek Frañs.

Techet eo Amin Maalouf da adlavarout memes traoù un tamm re alies met dedennus eo *Les identités meurtrières*. Da lenn gant aked. Arguzennoù a-bouez evit difenn al liested a gaver ennañ.

1 Perzhourezh : ar fed bezañ perzh, ezel eus ur rummad tud, ur sevenadur, ur relijion...

Close,
gant Martina Cole,
Headline, 2007,
664 fajenn, £6.99



Kinniget oa bet en niverenn 415 *Faces*, ur romant all gant Martina Cole. Kavout a reer amañ ur aergelc'h un tamm heñvel : e-touez gangoù torfedourien katolik a orin iwerzhonat e Londrez e vezer... Feulster a gaver evel-just ha darvoudoù e-leizh. Diforc'h bras, ur vaouez eo an dudenn bennañ : Lily Diamond. Dimeziñ a ra yaouank-flamm da Batrick Brodie, ur penn gang, genel a ra pemp bugel. Daoust dezhi bezañ labouret evitañ oc'h ober war-dro e gluboù, ne chom netra dezhi pa varv Patrick, lazhet en un doare feuls-kenañ dirak e vugale. Evit gellout bevañ ec'h asant bezañ mestrez ar penn gang a laka e arigrap war aferioù he gwaz... Ne grog an traoù da vont gwelloc'h nemet pa zeu he mab henañ, oadet a ugent vloaz pe war-dro, er-maez eus an


toull-bac'h hag e krog da adsevel stal e dad... An darempredoù familh (spontus a-wechoù...) o deus pouez er romant. Sklaer eo ster an titl er c'heñver-se. Melodramatek eo an istor. Mard eo plijus al levr da lenn abalamour d'an darvoudoù lies-seurt a gaver ennañ ez eo un tamm hirik a-wechoù. N'eo ket aes ar yezh bepred. Yezh torfedourien Londrez n'eo ket hini Oxford... Gwanderioù a gaver er stil evel e *Faces* met dleout a rafe plijout ar romant d'ar re a zo tik gant romantoù "du" skrivet, sañset, gant "*the only person who dares to tell it like it is*" (e meteier zo...).

PETRA NEVEZ ?



**Tudual HUON,
Herve LATIMIER,
Stefan CARPENTIER &
Malo BOUËSSEL du BOURG**

**Marv an arc'heskob,
gant Peter Tremayne,
An Alarc'h,
404 fajenn, 14€**



Dalc'hmat e vourran oc'h adkavout enklaskoù C'hoar Fidelma. Ha boas e vezer ouzh o lenn, a-drugarez da labour treiñ Jean-Michel Mahe. Goude *Koulm ar Marv, Absolvenn dre vuntr, Kegin d'ar Gousperoù*, setu *Marv an arc'heskob*. An arc'heskob hag un toulladig reoù all... evit hor brasañ plijadur. Rak Peter Tremayne n'eo ket pizh war ar muntrou.


Ha koulskoude e vefen techet d'ober romantou pedagogel eus e skridoù. Santet e vez e plij d'an aozer displegañ dre ar munud en ur reiñ buhez d'ul lec'h ha d'ur mare ha dre leurennañ tudennoù hag a zo o zro-spered hag o bredoniezh un arouez eus o flas er gevredigezh. Ken ez eo ar skrid, gwech-ha-gwech all, kelennus betek re marteze. Eus Roma ez eus anv

ar wech-mañ. E 664 emamp. Kêr Roma a zo penndudenn ar romant gant he falezioù skedus, he c'hevioù-beziañ du-pod hag he foblañs liesvroadel ha liesliv o vordilhañ war ar plasennoù meurdezus koulz ha dre ribouloù al lastez karterioù. Lazhet eo bet Wighard, arc'heskob Canterbury ha tamallet ul lean iwerzhonat dre ma oa o tec'hout diouzh

ranndi an arc'heskob. Etre lezenn Sant-Koulm ha lezenn Roma, n'eo ket stabil-stabil an traoù c'hoazh hag ar muntr-se a c'hellfe teurel plouz war an tan ha digeriñ brezel etre ar rouantelezh sakson hag Iwerzhon. Pedet eo Fidelma da ziskoulmañ an afer hep re a drouz...

MBdB

Mari-Vorgan ar glandour,
gant Goulc'han Kervella ,
tresadennoù gant
Christophe Babonneau,
Al Liamm,
110 pajenn, 12€



Ur Sadorn da noz evel ar re all e Bro-Leon, setu ma kaver ur vandennad moc'h o c'haloupat e-kreiz an hent ha dianket Alan Ogorig, mab ar perc'henn aet da vakañsiñ da Dunizia gant e wreg. Karget eo an enseller polis, Sezni Gwegen, da ren an enklask. Ned ay ket gwall bell danvez polis ar romant polis-mañ, un digarez n'eo ken an enklask evit lakaat ar gaoz war an ekologiezh, an ekonomiezh hag al lennegezh ivez. Gwerzhet

e vefe Breizh d'an arc'hant-bras ? « Seul vuioc'h, seul c'hoazh, » evel ma teu meur a wech e genoù an tudennoù er romant ? Etre daou ved emañ Alan Ogorig, diouzh un tu, mod sevel moc'h e dad, gant nebeut-tre a zoujañs evit an natur, ha diouzh an tu all, bed an ekologiezh. Diaes eo c'hoazh d'un darn vat eus ar gouerien tremen dreist ar vevenn, an harz, ha labourat an douar hep pistriañ, hep saotrañ pep tra hag ur rumm

nevez zo o tont, chaletoc'h gant doareoù lakaet da nevez, daoust m'int kozh, da c'hounit an douar ha da sevel loened.

Un dra all a gaver e romant Goulc'han Kervella : ar brezhonég. Sot e oa al labourer-douar yaouank gant yezh ar vro hag an enseller polis a ya d'e heul gant an hent-se. Setu ma weler ur vro en he fezh gant an arvor, an argoad hag he yezh.

Kerkoulz en lavaret deoc'h, evel romant polis, ne 'm eus ket kavet e oa dedennus. Muioc'h a voued spered zo e-keñver an ekologiezh hag an ekonomiezh goude ma chom an danvez-se evit krennarded. Soñj hoc'h eus moarvat eus ar bec'h a oa bet gant ar romant a oa da vezañ embannet gant *T.E.S.*, kent d'un den bennak eus an Deskadu-


rezh-Stad dont da lavaret ne c'halle ket al labour bezañ graet gant ti-embann ar skolioù abalamour ma oa anv eus Roparz Hemon. Ne adlakain ket ar gaoz war an diot ma oa an afer-se. Ma rankomp diverkañ anv Roparz Hemon, perak ne ziverkomp ket ivez anvioù an holl dud zo bet o kenlabourat, da vat, gant an nazied ? Ma !

An dave da romant Roparz Hemon zo dedennus hag emichañs e roy c'hoant da lod da lenn *Mari-Vorga*.

Lakait ar romant-mañ da vezañ lennet gant krennarded, evite eo bet savet. Tud boas da lenn avat hag o klask boued spered fonnus, ne gavot ket ho kwalc'h.

SC

**Opala Chapalain !, 1950-
2000 : an hanter-kant
vloaz o deus eilpennet
maezioù Bro Leon,
divizoù etre Pêr Chapalan ha
Bernard Cabon,
Skol Vreizh,
176 pajenn, 15€**



N'eo ket Pêr Chapalan ken brudet hag e geneil Aleksî Gourvenneg, goude m'en deus

c'hoariet ur roll a-bouez e buhez al labour-douar e Bro-Leon e-pad eil hanterenn an XX^{vet}

kantved. Leoniz, d'an nebeutañ, a oar mat eus piv ez eus anv. Gant ur penn breton, ha neket gant ur c'hrenner gwak, e reer anaoudegezh dre e gendivizoù gant e vignon Bernard Cabon. Ha brezhoneg yac'h war o zeod. Ur sapre prezeger e oa ar Chapalan-se, pa oa bet merzet e zonezonoù gant Visant Fave, ha pedet da vont da welout ar Pab gantañ e Roma. Hemañ, Person Kastell-Paol (ne oa ket bet anvet da eskob c'hoazh) en doa gwad dindan e ivinoù ivez ! Ken ez eo ar pajennoù ma vez kontet o beaj e Roma e-touez ar re c'hwekañ.

Ur stourm eo bet buhez Chapalan. Stummet e oa bet gant an *YKAM* (breuriezha Yaou-ankiz Kristen diwar Ar Maez) hag a oa e-kreiz he brud d'ar c'houlz-se. Labouret en deus

evit sevel strolladoù labourerien-zouar gouest da enebiñ ouzh an drafikerien a zalc'he ar beizanted dindan galzel-ge. Unan eus ar re o deus savet ar marc'had diouzh an dremm eo bet. Stourmet en deus evit modernaat al labour-douar neuze. Ha stourmet c'hoazh evit sevel e gein, p'en doa kollet e holl beadra gant ar c'hleñved a oa bet skoet e loened gantañ. Stourmet en deus evit bezañ maer e gumun ha kas da benn raktresoù na oant ket deuet mat gant an holl, e-giz orator Keri-zinenn. Ha stourmet adarre evit ma ve digollet kumunioù hanternoz ar vro goude peñse an *Amoco*. Un heklev eus ar birvidikañ da gemennadenn Anjela : « Stourm a ran war bep tachenn ! ».

MBdB

**Nous irons pleurer sur
vos ombres, Gouelit
ma daoulagad,
gant Yann-Fañch Kemener,
Yoran embanner,
246 pajenn, 18€**



Pa oan bet o sellout ouzh abadenn (hag o selaou kan, sonerezh ha komzoù...) Yann-


Fañch Kemener en *TNB* e Roazhon e oan bet fromet don gant e labour. Dreist eo gwelout

embannet un teuliad klok diwar-benn al labour arzel, istorel ha personel-se. Hag un teuliad kinniget brav : moulllet ha skeudennaouet kaer. Ur ger-digeriñ, ur c'hlozadur ha peder rann a gaver el levr. An div lodenn gentañ a zegas titouroù a-zivout Julien Joa, tonton-kozh Yann-Fañch, hag e familh. An trede a zo ur studiadenñ hollekoc'h a-zivout an *Non-Morts pour la*

France. Resis eo an teir rann-se ha santout a reer emouestladur an aozer en e enklask. Er pevare rann e kaver testenn an abadenn. Aliañ a ran hol lennerien da brenañ al levr-mañ, un oberenn a-bouez eo. Reiñ a raio un tañva eus an abadenn d'ar re n'o deus ket gellet he gwelout ha displegadennoù dedennus d'ar re all.

HL

**Yann-Kel Kernallegenn,
1954-1976,
marv evit ar vro,
Spered Gouez,
70 pajenn, 6€**



Un dra vat hag un dra ret e oa embann ul levr e koun ar stourmer yaouank, Yann-Kel Kernallegenn, marvet war dachenn kamp Ti Voujeret d'an 29 a viz Gwengolo 1976. « Ankounac'haat ar re varv a vefe lazhañ anezho un eil gwech. » Ar poz-se skrivet gant Elie Wiesel a c'heller lenn e penn-kentañ al levrig. Dre ar munut e konter deomp penaos

eo c'hoarvezet ar gwalldaol, gant unan a oa gantañ en noz-se, douetus. Kinnig a reer deomp ivez ar pennadoù a oa bet skrivet diwar-benn Yann-Kel, Kerna evit e vignoned, da vare an darvoud mantrus. Dismegañsus e oa bet pennadoù *Ouest France* pa oa bet lakaet ganto da baotr yaouank diskiant, trenk e spered ha sot hag evit *UDB* e oa marvet evit netra. Daou bennad un


tamm mat poellekoc'h ha dou-
jusoc'h da vihanañ a oa bet er
gelaouenn *Al Liamm* gant
Brewalan en niverenn 184 hag
en niverenn 178 sinet A.L. Dek
vloaz war-lerc'h en doa Martial
Ménard skrivet ur pennad diwar-
benn Kerna e-barzh niverenn 40
Al Lanv. Ul lid-koun a oa bet e
bered Kerfeunteun ha gwall
zister an niver a dud a oa deuet.
Daoust ha disoñjet e oa bet
Kerna gant ar Vretoned dek
vloaz war-lerc'h ?

Kement skrid bet aozet gant
Yann-Kel a c'heller lenn el

levrig (embannet e oant bet gant
Komz hag *Arz Breizhek* e 1977).
Kanerien ha barzhed a oa bet
skoet gant marv ar paotr yaou-
ank ha gant plijadur ha kalz
from e c'heller adlenn ar
skridoù-se : *Ti Voujeret* gant
Anjela Duval (*Al Liamm*, niv.
210), *Tarzhadenn ar marv* gant
Abalan (*Al Liamm*, niv 179), *E
dibenn miz Gwengolo* gant
Glenmor, *Gwerz ti Voujeret* gant
Youenn Gwernig, *Gwerz an
dizurzhioù* ha *Kenavo Yann* gant
Denez Abernot.

TH

Lavar 19,
Preder,
420 pajenn, 25€



Lavar 19 a vo taolet outañ ur
sell digustum marteze, eizh
vloaz war-lerc'h embannidigezh
Lavar 18. Rak bouetet eo bet al
levrenn-se, evit ur perzh mat,
gant eskemmoù posteloù daou
ramz aet da Anaon : Guy
Etienne, ha Martial Ménard.
Eno e vo kavet, neuze, goulennoù

resis ha respontoù ken resis all
diwar-benn ar sevel gerioù
nevez. Martial Ménard en doa
graet e vad eus an danvez-se
evit aozañ e c'heriadur galleg-
brezhoneg. Gant *Lavar 19* e
c'heller teurel ur sell dindan ar
golo, eta, evit kompren gwel-
loc'h mont en-dro ar c'heflusker.


Aesoc’h a se da neb a garo, ober e soñj diwar-benn reolennoù an nevez-c’heriañ, ha diwar-benn an tabutoù difin a sav diouto. Daoust pe zaoust e vo dedennet al lenner gant al labour don ha resis a zo bet kaset da benn gant an diaraogerien-se.

Er pennad kinnig skrivet gant Yann-Baol an Noalleg, unan eus kenlabourerien bennañ skipailh *Preder* e vez graet dave d’al linenn-stur a veze heuliet gant Guy Etienne : an disparti a rae etre ar yezh “destlel” hag ar yezh “kaozeek”. An div

c’herienn-se a zo termenet gant Guy Etienne er bajenn 220 : « Ar yezhañ a lavarfen destlel, a zo an ober gant ur yezh an unvanañ gwellañ, n’eo ket hepken en un amzer lavaret (sellet ent kevadegel neuze), met ivez a-dreuz an amzerioù (ent tradegel enta) hag ar yezhañ kaozeek [...] zo ar stummoù a gemer ar yezh destlel en arver a ra enezhi yezherien un amzer, ul lec’h, ur metoù un renkad, ur rannvro... ».

MBdB

Pepper&Carrot,
gant David Revoy,
brezhoneg gant
Stefan Carpentier,
Ar Gripi,
72 pajenn, 12€



Ur gwir zarvoud eo, e meur a geñver, levr bannoù treset *Pepper & Carrot*. Ne oa anezhañ nemet war internet evit c’hoazh. Eus istorioù berr ur sorserez yaouank Pepper hag he c’hazh Carrot ez eus kont. Troc’hadoù buhez faltazius, boemus ha fentus war un dro. Gant an tresadennoù

on bet desachet diouzhtu. Livioù flamm ha tomm. Skeudennoù a oar bezañ naet-kenañ daoust ma paot ar munudoù resis enno. Hag ur meni mousfent barzhonius hep e bar, a zo sinadur gwir an aozer. Plijadur am eus bet o lenn al levrig kaer-se, lakaet e brezhoneg gant Stefan Carpen-

tier. Ul levr evit an holl neuze, war-bouez ar re vihan dindan pemp pe seizh vloaz, marteze. Bourrañ a c'hallfent ober gant kaerder ar skeudennoù met diaesoc'h e ve dezho kompren mat ar fent, moarvat.


Nevez eo *Pepper & Carrot* evit abegoù ouzhpenn evelkent. Tennet eo eus ur « *webcomic* digoust, frank ha mammenn digor, harpet war-eeun gant e baeroned evit kemmñ greante-rezh ar bannoù-treset ». Da lavarout eo e c'hell neb piv bennak ober gant *Pepper & Carrot* hep paeñ gwirioù. Bevañ a ra an aozer diwar mesenerezh e lenne-

rien. Bez' e c'heller ober ur prof adalek un euro. Gant ar pennad kentañ e oa bet displeget e ven-nad gant an aozer. An eil pennad a oa bet mesenet gant 21 paeron. Ar pennad nevesañ (an niv. 19) a zo bet mesenet gant 755 den er bed a-bezh. David Revoy a zo gall, met e levr bannoù dreset a zo bet troet e 18 yezh dija. An holl anezho a gaver war al lec'hienn : www.peppercarrot.com.

Un doare nevez da dizhout an danvez lennerien yaouank eo. Ha ma vefe kement-se dazont an embann ?

MBdB

Bugaled Breizh,
37 eilenn,
gant Paskal Bresson
hag Erwan ar Saeg,
brezhoneg gant
Jeremi Kostiou
Nadoz-Vor Embannadurioù,
144 fajenn, 20€



« Serj !... O troc'holiañ emamp... Deus buan ! » Sed ar c'hri-forzh a glevas Kapiten an Eridan en e radio digant Youn Gloagen, Kapiten ar *Bugaled Breizh*, d'ar 15 a viz Genver 2004 da 12e25. En ur ober ur

vunutenn hanter, goude bezañ laosket da vont funioù ar sac'h-drag par ma c'hallent, ez ae ar *Bugaled Breizh* hag e gouch d'ar strad. Ha beuzet ar bourzhiad en e bezh. Pemp familh er glac'har.

Daouzek vloaz war-lerc'h, n'eo ket bet diluziet da vat ar penaoz hag ar perag. Ur gwall afer, pa vo lavaret, rak an deiz-se e oa listri-spluj oc'h ober pleustradegoù brezel tro-war-dro. Diaesoc'h a se kas an enklask da benn, pa ouzer pegen start e c'hell bezañ ar rin-stad pa vez anv eus listri-spluj estren.

Ma n'ho poa ket heuliet an afer-se a-dost e vo aesaet deoc'h gant enklask Arthus Bosenneg, un dudenn bet ijinet gant Paskal Bresson hag Erwan ar Saeg evit titouriñ ac'hanomp war doareoù ar peñse. Ur c'hazetenner kozh kontet da vezañ er-maez ar jeu an hini eo, met diskouez a ra bezañ mennet ha pennek. Ha n'eo ket prest da lonkañ lostoù

leue. Gant skoazell ar skeudennoù ha renabl munudoù digomprenus (ar radell ruz dianav, ar viñsaskell gevrinus, ar c'houc'h distummet gant trummder splujadenn an dragour) e teu da vezañ gwirheñveloc'h-gwirheñvelañ martezeadenn kiriegezh ul lestr-spluj hag en dije kroget e rouedoù ar chaluter ha kaset anezhañ d'ar strad ken aes ha tra. Seurt gwallzarvoud zo bet c'hoarvezet c'hoazh. Setu neuze, kontet dre ul levr bannoù-treset, istor skrijus peñse ar *Bugaled* ha stourm ar familhoù evit gouzout ar wirionez hag adkavout un tamm sederoni.

Evit gouzout hiroc'h : www.bugaledbreizh.org.

MBdB



Riwal HUON
Jerom OLIVRY
Tudual HUON

nebeud hentoù evit klask digreskiñ an efedoù war hir dermen. Ur pennad-kaoz a lenner gant Yves Lebahy, douaroniour anezhañ, diwar-benn an hingemm e Breizh, peadra da brederiañ war pouez (emzalc'h ha boazioù) pep hini ac'hanomp hag ar pezh a c'hellomp, war ar pemdez, lakaat e pleustr. Reoù zo c'hoazh ne gavont ket dezhe ez eo gwall wir e vefe ur gudenn tommadur an hin : kemer tro a reont evit diorren muioc'h c'hoazh ho lobi ! Echuiñ a ra an teuliad gant ur pennad diwar-benn ar C'hop21 aozet e 2015, hag a ro un tamm spi, daoust da gomzoù un nebeud zo, a soñjfe dezhe e oa bet ur mor dezerzh ar Sahara

> Bremañ (411)

Troet eo niverenn 411 **Bremañ** war an endro hag ar stourmoù evit e wareziñ, kement evidomp hag evit ar rummadoù da zont.

En teuliad, anvet *Tan e-barzh an ti* !, ez eus da gentañ un adgalv eus arbennoù stad an traoù an deiz a hiziv, hag an efedoù e Breizh (hag e lec'h all evel-just !), a-raok reiñ un

ha ne vefe ket Mab-den kiriek eus an hingemm.

En e gronikenn *N'eus netra skianteloc'h* ! e skriv Tangi Legavre diwar-benn ar c'harbon 14. Ha petra a soñjo arkeologourien an dazont pa gavint « fosiloù eskern yer e dismantrou ar c'hêrioù-meur » ? Dre forzh sellet e lec'h all pa vez tan e-barzh an ti e c'hallfe Mab-den bevañ e varead diwezhañ, hini an *antropoken*.

El lodenn *Bremañ er bed* e lenner pennadoùigoù a bep seurt : dismantr bras en Haiti abalamour da gorventenn Matthew ; ar wichita (rannyezh indian) en arvar pa 'z eo aet da Anaon ar wichitaerez ziwezhañ a-vihanik ; yezhoù Frañs o klask kaout ar gwir bezañ anezhe el lezennoù ; Bro-Gatalan o vanifestiñ evit chom hep kouezhañ e puñs an ankounac'h ; pe c'hoazh Katalaned o stourm evit ur Republik katalan.

Pevar-ugent vloaz zo e kroge brezel diabarzh Bro-Spagn. Dont a ra en-dro skridaozerien ar gelaouenn war an diktatouriezh, al lazhadegoù. N'eo ket diabeg seurt darvoudoù hag ur republik a c'hall bezañ diskaret ken aes ha tra a-wechoù...

Deskit 'ta penaos e ya en-dro an Deskadurezh en Israel el lodenn *Broioù & pobloù*. Skolioù divyezhek a vez kavet eno ivez. Ha pa chom dister o niver, ha pa vefe an tu dehoù a-enep seurt skolioù, e c'hallomp gwelet anezhe evel tachennoù bihan a zoujañs e-kreiz ur mor a zigasted.

Er pajennoù *Bremañ e Breizh* e komzer eus manifestadegoù : Kernitron-al-Lann, Breizh adunanet, pe c'hoazh Suniz o vanifestiñ evit kaout tredan nevezadus. Digollet eo bet daou labourer eus *Triskalia* goude ma oant bet pistriet gant diasturezioù, ha Stad Frañs oc'h enebañ ouzh ar stourmoù rannvroel : nac'het eo bet gratadur *Bretagne Vivante* evit al Liger-Atlantel en abeg ma ne gasont ket an traoù e Frañs a-bezh, kar n'emañ ket Liger-Atlantel e Breizh evite.

Ur bajenn a zo gouestlet el lodenn *Bevañ e Breizh* da Vartial Ménard, aet da Anaon d'an 8 a viz Gwengolo 2016.

Fonnus eo al lodenn *Levrioù, arzoù, embann* gant un toullad levrioù bet embannet nevezik zo, evit a bep seurt lennerien !

Anaoudegezh a reer gant Thelonius Monk, sonaozer donezonet-dreist ar c'hantved

tremenet. Emzeskard, bet eo bet ar soner-se unan eus luskerien ar bebop er bloavezhioù 1940, aet da soner jazz da c'houde, ha kenlabouret en doa gant ar re wellañ. Ar pennad-mañ a zo an hini kentañ eus un heuliad anvet *Sonerien veur ar blues hag ar jazz*.

Sed aze ur c'hoari lakaet da sport : ar C'habbadi a vez

c'hoariet en Azia. Ar reolennoù a anavezit mat, peogwir e tenn ar sport-se d'ar « c'hoari bleiz » !

Echuiñ a ra an niverenn gant ar bajenn lipous ! Daou rekiye aes-tre da fardañ : kourjetez trenk dous, ha rilhetez sardin.

JO

> Al Lanv (138)

Gouestlet eo pajennoù kentañ ar gelaouenn d'hor mignon Martial Ménard. Eñvorennoù fromus ha plijus gant Daniel Doujet d'ar mare ma veze labouret hardizh evit pourchas dafar da skolidi *Diwan*, d'ar mare-se e veze kenlabour stank gant ar skolaerien evit krouiñ ar pezh a rae diouer dezho evit kelenn. An daou bennad da heul a zo bet savet gant Herve Bihan, mignon bras da Vartial ha gant Padrig an Habask.

Kervalan ivez en deus savet div varzhoneg kaer en eñvor da Vartial : *Omerta* hag *Andonier ar brezhoneg*.

Yannig Laporte en deus savet ur pennad diwar-benn Yann Kel Kernallegenn hag al lid a oa bet e bered Kerfeunteun evit dougen

bri d'ar stourmer aet diouzhimp daou-ugent vloaz zo dija. Div varzhoneg a zo bet savet en e eñvor : *Da yann-Kêl* gant Padrig Korle hag *E bered Kerfeunteun* gant Kervalan.

Lenn a c'heller ur pennad gant Loeiz Gwilhou (embannet er gelaouenn *Ya !* ivez) : *Karan-tez kentañ*.



Ur pennad gant Paol ar Meur a oa bet embannet er gelaouenn *Le Peuple Breton : Utopiezh an hent touellus*.

Emañ Aleksandr ar Gall o vevañ e Santander e hanternoz Bro-Spagn ha skrivet en deus ur pennad hir war stad marc'had al labour er vro, an deskadurezh ha temz spered an dud.

Gant Gireg Konan ez eus kaoz eus ar c'horseg, un divyezhegezh strujet fall.

Distro-skol *Diwan* gant Padrig an Habask. Ur c'hresk a 3,54% a zo, ar pezh zo frealzus, padal diouer a gelennerien a zo. Ar stummadurioù war 6 miz n'int ket a-walc'h evit bastañ da ezhommoù ar c'helenn.

Tri Breizhad en tu all da linenn an enebourien a zo ur pennad hir bet skrivet gant Olier an Dour ha lakaet e brezhoneg gant Jo Martin diwar un destenn c'hallek. Kaoz a zo enni eus divroañ hag enbroañ ar Gelted en tu all d'ar mor war-du New York, ar Frañs-Nevez, Albany. Meur a Vreizhad a zo erruet e Bro-Kanada gant rejimant Carignan hag er pennad kentelius-mañ e reer anv eus tri dioute : Pêr Marc de Garreaux, René Poupert ha Kristol Bruzal.

Karget e oa rejimant Carignan da sujañ an Irokiz.

Lod eus ar soudarded-se a chomo er vro evel rederien-koadoù hag int-i floderien feurioù an avanked.

Arver hag amkan gant Iwan Gwegan. Petra a c'hell ur gevredigezh aozet hervez lezenn 1901 ober a-fet feurmiñ, prenañ. Kement-se a oa bet meneget gant I. Gwegan el *Lanv* ur pennadig zo. En-dro-mañ e tispleg d'al lennerien petra a c'heller ober pa cheñcher amkan : krouiñ un obererezh nevez en ul lec'h gouestlet d'un obererezh all, da skouer. Daoust hag e c'heller staliañ ur skol vrezhonek en un ti-annez ?


Paul de Flotte, un denjentil breizhat marvet evit ar reveulzi italiat gant Aline Gleoneg. Ganet e oa e 1817 e Landerne en un tiegezh eus an noblañs. Mont a reas a-du gant ar frankizourien ha kemer a reas mennozhioù Fourier. Toullbac'het e voe er Gerveur evel Blanqui. Rankout a reas tec'hout kuit goude an emsavadeg c'hwitet a-enep Napoleon III hag a-benn ar fin ez eas da heul Garibaldi evit stourm ouzh ar Bourboned en Italia. Lazhet e voe e Kalabria.

Evel kustum ez eus *Keleier an Embann* gant Alan Botrel. E dibenn ar gelaouenn e c’heller lenn teir barzhoneg gant Yulia

Borisova : *Donezon an Arzour, Yezh ar bleunioù, Ar gaoued c’houllo.*

TH

> Hor Yezh (287)



Ar c’hiz eo bet embann levrioù diwar-benn Breizh-Izel e penn kentañ an XX^{vet} kantved, levrioù kaer alies met nebeut a vrezhoneg enne. E levr Henri-François Buffet (1907-1973), *En Bretagne Morbihannaise*, eo stank ar gerioù brezhonek. Ar pezh a zo talvoudus eo ar mod ma vezont degaset deomp, displeget spis ha splann en endro ma “vevent”. Setu ar pezh a lâr Daniel an Doujet e pennad

digeriñ ar renabl gerioù diwar al levr-mañ (3 fennad a vo). Gwir eo eo stank an troiennoù war ar micherioù da skouer : *petra ’lak er meliner da vout peur ? P’en deve gran, n’en deve ket deur.* Da heul zo ur studiaden diwar zorn Herve Seubil gKernaoudour diwar an dornskrid niv.20 *creation ar bet* eus levraoueg skol-veur Roazhon. Pelloc’hik e tesker eo ar ger “plac’h” ur ger estonus, n’eus kemmadur ebet da gentañ tout hag ur poz gourel alies e-touez an dud gwechall. Roiñ a ra Divi Kervella un dornadig skouerioù gant ar stumm “plac’h bihan”. Da echuiñ niverenn 287 ar gelaouenn eo lakaet ar gaoz war implij ar grafemm *c’h* e galleg [x] evit ur yezh all estreget ar brezhoneg hag ur gwerz kozh *Gwerz war skwer fall Skol gristen Begard* zo kinniget ul luc’heilenn anezhañ.

RH

> Le Peuple breton (634)



Ar pennad kentañ a c’heller lenn e kelaouenn *UDB* a zo bet skrivet gant Marc Le Duc, bet kelaouenner *Ouest-France*. Evit renerien *OF* hag un toullad kelaouennerien n’emañ ket Naoned e Breizh, derc’hel mort a reont d’an doare m’eo bet disrannet Breizh hag er c’heleier embannet war pajennoù « Loire Atlantique » *OF* n’eus ket kaoz eus an darvoudoù a c’hoarvez en departamantoù all, n’eus ket anv da gelaouiñ al lennerien war ar pezh a c’hoarvez e lec’h all e Breizh. Dispriz o doa lod kelaouennerien ouzh danvez

Breizh evel gwechall e Chan-tenay pa veze c’hoarzhed goap ouzh ar vrezhonegerien, eme Marc Le Duc.

Gael Briand ha Maxime Touzé o deus skrivet bep a bennad en eñvor Jean-Claude le Gouaille aet da Anaon trumm. Rener *Le Peuple Breton* e oa, brezhoneger ha pennskridaozer al lodenn vrezhonek er gelaouenn e oa bet e-pad pell. Maxime Touzé en doa kemeret ar garg-se un nebeud mizioù zo. E-touez al lizheroù kaset d’ar *PB* e oa ur pennad e brezhoneg gant Joël Martini diwar-benn ar vanifestadeg a oa bet d’an 2 viz Here e Flamanville a-enep ar greizenn *EPR* emeur o sevel eno. Nav bloaz zo eo kroget al labourioù ha n’eo ket peurechu c’hoazh pa sav kudennoù gant ar sioù a zo gant golo ar veol ha meur a dra all. Ouzhpenn teir gwech ar priz raktreset e kousto ar greizenn nukleel-se.

E-giz kustum eo puilh ar pennadoù er gelaouenn : an diouer a gengred etre ar broioù en Europa pa ’z eus anv eus repuidi ; ar repuidi o tont da Vreizh. Reuz a zo bet (tennoù fuzuilh war an ti-repu e Sant-Brewenn memes) hag enebiezh meur a wech ivez. Memestra ez

eus tud darev da reiñ o skoazell e meur a lec'h : e Trebeurden, Tregastell, e Felger paneveken.

Gregor Mazo en deus savet ur pennad diwar-benn *Divskouarn*, un aozadur e karg eus an deskiñ brezhoneg d'ar re vihan ha d'ar re a zo e karg anezho er magourioù. Adal bremañ e c'heller ar gevredigezh *Divskouarn* kinnig ur stummadur dibaouez aozet a-ratozh-kaer evit an dud a-vicher hag an *ATSEM* hag a labour er magourioù.

El lodenn vrezhonek ez eus ur pennad gant Paol ar Meur diwar-benn an Utopiezh. N'eo ket, emezañ, an hent a c'heller mont gantañ evit sevel ur gevredigezh yac'h. Div bajennad a zo gouestlet d'al levr bannoù-treset nevez embannet : *Bugaled Breizh*, 37 eilenn. Skrivet eo bet gant Paskal Bresson hag Erwan ar Saeg hag embannet e brezhoneg gant *Nadoz-Vor Embannadurioù*.

Herve Lannuzel a ginnig deomp daou levr bet lennet gantañ : *An estren*, levr Albert Camus *L'étranger* bet lakaet e brezhoneg gant Erwan Hupel hag embannet gant *Skrid*, ha *Buhez Mab-den, Souezh, douetañs ha marv* skrivet gant

Fañch Kerrain hag embannet gant *Mouladurioù Hor Yezh*.

Morgan Tremel en deus graet un diverrañ eus niverenn 418 ar gelaouenn *Al Liamm*.

El lodenn etrebroadel ez eus ur pennad sklaer ha resis, skrivet gant Jean-François Morvan, war rannvro emren Xinjiang ha kudenn ar Ouighoured. Kalz hidrokarbidennoù a zo en douar ha Sina a ra strivoù bras evit diorren ar rannvro-se ha lakaat ar Ouighoured eus o zu kousto pe gousto.

Anv zo ivez eus ur film bet sevenet gant Mathilde Jounot : *A qui profitent les océans ?* war zigarez saveteiñ ar pesked e vez roet d'an AAG (ONG e galleg) ar galloud da verañ ar stok met paeet int gant embregerezhioù etrebroadel n'int tamm ebet war ur raktres diwall an endro.

Levr ar miz dibabet gant Klaod Thomas a zo bet skrivet gant Isabelle Boulanger : *L'Exil espagnol en Bretagne* (embannet gant *Coop breizh*).

> **Le Peuple breton (635)**

E lodenn vrezhonek niverenn 635 **Le peuple breton** e kinnig *UDB* yaouank ur pennad diwar-

benn Kernev-Veur. Trubuilh a zo da gaout p'emañ gouarnamant Londrez o reiñ lañs d'un adreizh tiriadel. Digreskiñ an niver a bastelloù-bro a fell da Vro-Saoz ober ha lakaat an Devon ha Kernev-Veur asambles : *Devonwall* a vefe anv an tiriad nevez. Chalet eo ar Gerne-veuriz ha peadra a zo pa ouezer penaos emañ kont ganeomp e Breizh dastroc'het evel m'eo bet.

Kaoz a zo ivez gant Fañch Bihan-Gallic eus stourm Amerindianed an Dakota a-enep an eoulsan a felle da *Energy Transfer Partners* sevel e bro ar Sioued. Nevez zo hon eus gouezet e oa bet dilezet ar raktres gant Obama. An trede pennad a c'heller lenn a zo diwar-benn ar *Brexit*. Ur bern tud a zo bet o klask kaout ur pasport iwerzhonat. Setu aze an diskoulm bet kavet gant Breizh-veuriz ha tud Iwerzhon an hanternoz evit derc'hel o gwirioù da zilojañ e kement bro en Europa. Gant Paol ar Meur ez eus kaoz eus Republik Frañs dindan renerezh François Mitterrand. Ur bajennad a zo gouestlet d'al levrioù brezhonek evit ar vugale hag Herve Lannuzel a lak ar gaoz war

pevar levr bet lennet gantañ : *Ar beskont daouhanteret* gant Italo Calvino troet gant Serj Richard, *La semana de Fray Arturo*, *Sizhun ar breur Arturo* bet lakaet e spagnoleg gant Aleksandr ar Gall hag Elva Aler Rafael, *Mor ha bagoù Geriaoueg* gant Marcel Maudire, ha *Skleur en noz*, un dastumad danevelloù bet skrivet gant Pierrette Kermoal. Un diverrañ eus niverenn 411 *Bremañ* a c'heller lenn ivez.

TH



[illegible]

Kemenn a reer d'al lennerien
eo aet da Anaon Magdaleine
Mauger, gwreg Yann Fouere.
Tost da 100 vloaz e oa-hi.

Musique bretonne (249)

**Musique
bretonne**

Actualité du patrimoine oral de Bretagne

2016

LES JEF ET M
RENDEZ-VOUS
CROQUE DE L'HIVER

9 JANVIER
LE CAP - PLESTIN (22)

12 JANVIER
UNIVERSITÉ BRENNES 2 (35)

15 ET 16 JANVIER
LA GARE - GUER (56)

16 JANVIER
PLEDRIAN (22)

Jef et M'er
La Corée aime le fest-noz!
Ti Kanirf Breiz
La pastorale de Poullaouen (1^{re} partie)

E-touez ar c'heleier e tesker eo echu da vat ti embann pladennoù *Keltia Musique* krouet e 1978 gant ar soner Herve Le Meur. Meur a bennad a zo ivez diwar-benn ar sonerien pe konterien aet da Anaon hag en o zouez Marcel Le Floc'h (Gwendal), Hyacinthe Guégan, soner akordeoñs a oa bet gwelet en teulfilm aozet gant Ronan Hirrien : *N'eo ket echu ar fest ganimp*. Bernard Lasbleiz a gont deomp istor *Ti kaniri Breiz*, un aozadur krouet e 1900 evit kas war-raok ar c'hanaouennoù

brezhonek. Lod tud evel Taldir Jaffrennou, Erwan Berthou a oa aet skuizh o klevout sonioù *Cabaret breton*, doare Montmartre da geñver bodadegoù URB (*Union Régionaliste Bretonne*) ha savet ganto *Ti kaniri Breiz*. An abadenn gentañ a oa bet kinniget e Lok-Mikael-

an-Traez, deiz ar pardon. Patrick Malrieu a lak ar gaoz war an Noueloù hag an hini anavezetañ, hini Poullaouen (*la pastorale de Poullaouen, dernier témoignage breton d'une forme de spectacle médiévale*).

TH



**Herve LATIMIER,
Annaig KERVELLA &
Tudual HUON**

HOR MIGNONED

Kañv :

Aet eo Philippe Mell da Anaon d'an 28 a viz Here da 63 bloaz. Lidet eo bet e obidoù war un ton breizhek-tre e chapelig ar C'hann, e Speied, e barrez muiañ-karet. Graet en doa e vuhez labour en *Telecom*, e Pariz ha buan-tre e Kemper, e-lec'h ma oa bet prezidant a-youl vat skol Diwan eno. Dilennet 'oa bet en ti-kêr war listenn an tu kleiz (1995/2001) ha deuet 'oa da vezañ eil-vaer e karg eus an touristerezh hag eus ar glad sevenadurel ha war an dro eta eus ar brezhoneg. D'ar mare-se en deus graet e seizh gwellañ evit reiñ un tamm plas d'ar brezhoneg e kêrbenn Kerne, dindan beli ur maer ha ne oa ket gwall chalet gant dazont hor yezh. E Speied e kemere perzh ingal e buhez sevenadurel ar gumun, krouet en doa ar bagad, difenn a rae skritur reizh an anvioù-lec'h e brezhoneg... Ul levr en doa skrivet diwar-benn orin ar familh Mell en ur vont da furchal betek ar bloavezh 1630 ! Ezel *UDB* e oa bet e-pad ur prantad hag e-barzh *MBP* Christian Troadec abaoe deroù ar strollad-se.

Charlie Grall

D’e diegezh, d’e vab Thelo, koumananter feal d’Al Liamm, ha d’e holl vignoned e kasomp hor gourc’hemennoù a gengañv.

Mark Gaultier Koedlezvareg, bet ganet e Douarnenez e 1938 a zo aet da Anaon e miz Ebrel 2016. Deuet e oa da chom da Ploubêr er bloavezhioù 60.

Bet eo bet unan eus krouerien banniel Treger. Gwenaner a vicher, e werzhe mel hag ober a rae chouchenn. Savet en doa *Kav an aerouant ruz*.

Plijout a rae dezhañ kalz an Istor, dreist-holl istor Breizh ha studiañ al lignez, embannet en doa *Les fiancés, les prétendants et les époux de Anne de Bretagne-Dreux* skignet gant embannadurioù *An Alarc’h*. E-pad bloavezhioù en doa labouret war istor ur vaouez eus Douarnenez, Sophie Renot, moereb dezhañ, anavezet mat du-hont dre m’he doa graet kalz evit ar re glañv hag ar re baour. Un toullad mizioù a-raok e varv eo deuet e levr er-maez : *Douarnenez, la vie et l’oeuvre de Sophie Renot*, embannet ivez gant *An Alarc’h*. Ur pikol levr gant a-leizh a skeudennoù hag a ditour diwar-benn buhez Douarnenez en XIX^{vet} kantved. War e lerc’h ez eus manet ur studiadenenn diechu diwar-benn ar postoù kleuz e Breizh.

Riwanon Kervella

Serj Pineau a zo bet ganet e 1931 en Añjou hag aet da Anaon e Ploufragan e miz Here 2016. Abred eo bet dedennet gant an danvez keltiek hag an drouizelezh. Ezel eo bet eus ar *Gredenn Geltiek* ha kemeret en deus perzh er gelaouenn *Kad*. Er *MOB* eo bet ivez hag oberiant e stourm an *ARB* hag an *FLB*, toullbac’het eo bet evel meur a hini all er Santé e Pariz. Un treser donezonet e oa hag e teuas da vezañ rener arzhel an embannadurioù *Kelenn* bet savet gant Glenmor, Xavier Grall hag Alain Gouel ha bet eo ivez sekretour *Skoazell Vreizh*. Reiñ a rae kentelioù arzh keltiek e *Kreizenn Sevenadurel Abherve* e Sant-Brieg.

Skrivet ha treset en deus al levr *Magie de l’Art celtique ancien* embannet e ti *Coop Breizh* hag e 2015 eo bet embannet e

dresadennoù hag e skrid e galleg diwar *Ar Gelted koz* gant Mordiern ha Vallée gant *An Alarc'h*.

E anv drouiz a oa Esunertos. Da geñver e obidoù, ul lid drouizel, eo bet lennet ha roet d'ar berzhidi ar varzhoneg en doa skrivet evit kimiadiñ. Setu amañ an droidigezh.

Evit ar re a garan...
Hag evit ar re a gar ac'hanon

Pa ne vin ket amañ ken, lezit ac'hanon da vont kuit
Kement a draoù am eus d'ober ha da welet.

Arabat gouelañ pa soñjfet ennon
Bezit anaoudek eus ar bloavezhioù kaer,
Deoc'h em eus douget mignoniezh.
N'hellit nemet divinout
Al levenez ho peus roet din.

Ho trugarekaat a ran evit ar garantez ho peus diskouezet em
[c'heñver
Ar fiziañs a zegaso deoc'h kennerzh ha frealzidigezh
Dispartiet e vefomp evit ur prantad
Lezit an eñvorioù sioulaat ho klac'har.

N'on ket pell hag ar vuhez a gendalc'h...
M'ho peus ezhomm, galvit ac'hanon hag e teuin.
Zoken ma n'hellit na gwelet na stokañ ac'hanon, aze e vin
Ha ma selaouit ho kalon, e santfet anat
Douster ar garantez a zegasin.
Ha pa vo ar c'houlz deoc'h-c'hwil da guitaat,
E vin aze d'ho tegemer.

N'on mui em c'horf, met gant an doueed,
N'it ket war ma bez da leñvañ,
N'on ket aze, ne gouskan ket,
Me eo an avelioù diniver a c'hwez
Me eo steredennerezh strinkennoù an erc'h,
Me eo ar sklêrijenn a dreuz ar parkeier ed,

Me eo glav flour an diskaramzer
Me eo dihun an evned e sioulder ar beure
Me eo ar steredenn o luc'hañ en noz

N'it ket da ouelañ war ma bez,
N'on ket aze, n'on ket marv.

Riwanon Kervella

Mantret omp bet o teskiñ e oa aet Jean-Claude Le Gouaille da Anaon d'ar 15 a viz Here 2016. Lenner ha difazier a vicher, Jean-Claude 'oa ur stourmer kalonek hag un den hegarat. Unan eus krouerien kevredigezh *An difazierien a Vreizh* 'oa, labourat a rae a-youl vat evit Gouel Levrioù Karaez. Rener an embann evit *Le Peuple Breton* 'oa betek e varv ha graet en deus e-pad pell war-dro pajennoù brezhonek *Pobl Vreizh*. Ezel eus burev *Kevredad Penn-ar-Bed UDB* 'oa ivez. Darempredoù a genlabour hag a vignoniezh en doa gant izili zo eus skipailh *Al Liamm*. Kas a reomp hor gourc'hemennoù a gengañv d'e familh ha d'e gamaladed. Ra vo skañv douar Breizh evitañ !

PROFOÙ

Miz Gwengolo : Alan Judicael GACHET; Didier AR BELLER;
Pierig AN DIGERC'HER; Jean-Yves LE GOFF; Jean OLLIVRO;
Gilbert KEROUANTON; Michel LESCOP; Derec STOCKLEY;
Armél LE SEC'H; Pêr DREZEN

— War un dro : 235€

Miz Here : Robert GOUZIEN; Lanwenn LE CORRE; Gérard ROLLAND

— War un dro : 115€

*Mil drugarez a lavaromp ur wech ouzhpenn
d'hor skoazellerien.*

LIZHIRI

Postel a-berzh Youenn ar Gag miz Here 2016

« Kenvroad/Kenvroiz,

Gwall nec'het on abalamour ma kasan deoc'h c'hoazh ul lizher-skridig burutellañ-rebechiñ, ur skrid pismigañ a lavaro lod... Met ne c'hallan ket lezel brud unan eus gwellañ skrivagnerien brezhonek zo er mare-mañ da vezañ stlabezet e gaou... Gwir eo ez eus ur c'hrennlavar hag a lavar "Ar chas a c'hall harzal met tremen a ra ar garavanenn"... Reoù all, garvoc'h, a zo ivez...

EVEZHIADENNOÙ DIWAR-BENN UR PENNAD KINNIG
ER RUMM *PETRA NEVEZ* ?

(*Diskrap e Skrabyar* gant Yann Gerven)

En niverenn 416 *Al Liamm* (n'eo ket ken an niverenn diwezhañ, hennezh zo o paouez en em gavout ganeñ), er rummad *Petra nevez* ?, em oa gwelet ur pennadig kinnig diwar-benn *Diskrap e Skrabyar*, pennadig hag a oa bet skrivet gant Stefan Carpentier (SC)... Hag al lev-se 'oa bet lennet ganeñ... Ha plijet 'oan bet gantañ ! Ha me da lenn raktal an diverrañ-se evel-just !

Mat eo penn kentañ ar c'hinnig (war-bouez un droienn-yezh souezhus : « Karget eo ar c'homiserez Pedel eus an afer » hag a zo flaer ar galleg troet ganti... Met petra 'rit, pa n'eo ket displejus ar pezh a lenner e tremener buanoc'h hag aezetoc'h war seurt traoù, bremañ !...).

Ur begadig a vel a vez roet da Yann Gerven zoken ! « Savet mat eo ar romant. Berr ha skañv eo, peadra da gas ur pennadig hep terriñ ho penn. » Mat !

Met kement-se, ne oa nemet evit gallet skourjezañ seder : pa oa bet roet un tamm komplimeñchoù gant SC, e c'halle mont de'i !

« Marteze e kavo da lod ez a un tammig re bell gant ar *private joke* pa 'z eo liammet an itrik ouzh bedig-bed ar brezhoneg, ar skolioù-meur, h. a. h. a. Fent Yann Gerven eo avat hag hep mar ebet e plijo ar romant-polis-mañ d'ar re a zo tik c'hoazh gant e skridoù. »

Ga ! Kalz a *brivate jokes* e levr Yann Gerven, e *Diskrap e Skrabyar* ? Ha me souezhet avat !... Kentañ evezhiadenn a riñ amañ avat : n'eus bet roet skwer ebet gant SC...

Ur *private joke*, petra eo se ? Ur farsadenn na ve komprenet nemet gant nebeut a dud a lavarfed... Nebeut-tre a rankefed lavaret da gentañ... Ha muioc'h evit se zoken : farsadennoù zo graet evit un nebeud mignoned, ken n'eus nemet ar vignoned-se hag a c'hall kompren...

Gwir eo n'eo ket aezet diñ c'hoarzhin da vat pa vez, gant YG, farsadennoù hag a c'hoari gant ar saozneg, al latin pe an alamaneg pa n'ouzon kazi seurt er yezhoù-se !... Met se n'eo ket *private jokes* : kement hini hag a oar saozneg, latin pe alamaneg a c'hall kompren, ha c'hoarzhin diouzh an degouezh (evit lavaret ar wirionez e rankan lavaret e vez roet an droidigezh gant Yann Gerven peurliesañ...)

Kaer em eus bet adlenn ha klask gwir b-*private joke*, n'em eus ket kavet. Gwir eo e vez, gant YG, farsadennoù a c'houlenn ledanoc'h kultur eget bidennnoù FR1 pe Antenne 2 !...

Ar mevel-poliser a oa tapet berr, pa oa o renabliñ ar meiloù 'oa bet resevet gant Jili, gant un meil 'oa anv eus ar *Magna Carta* ennañ !... (p 84). N'eo ket ur *private joke* daoust da se ! Gwir eo, ne vezer ket ken kollet pa ouier petra 'oa ar *Magna Carta*... Met n'eo ket mignoned YG ar re nemete a c'halle gouzout petra oa : komprenus ha damsklaer e oa evit an holl re a oar un dra bennak eus istor ar broioù en Europa. *Magna Carta* a oa ar feur kentañ a renkas roue Breizh-Veur, Yann Dizouar, asantiñ dezhañ e 1215, ur feur hag a vevenne galloud ar roue hivizken eno. Met an holl a oa rampo adal ar bajenn 90 pa zisplegas an den en doa skrivet ar meil petra a faote dañ lavaret pa 'n oa graet anv eus ar c'h-*Carta*-se...

Ne c'hallañ ket dere'hel da glask an arroudennoù a c'hallfe bezañ tammallet da YG. M'hen rafe, e c'hallfen komz eus ar farsadenn diwar-benn al levr gallek *Le miroir de la mort* (!), diwar-benn brezel ar skritur : met ouzhpenn mignoned YG a zo gouest da gompren nê (ha da vousec'hoarzhin diouzh an dro), n'int ket *private jokes*.

SC a ro ur merk eus ar *private jokes*-se memestra : « Un tammig re bell gant ar *private joke* pa 'z eo liammet an itrik ouzh bedig-bed ar brezhoneg, ar skol-veur ».

El levr ez eus anv a vont da enklask betek e Skol-Veur Brest er bajenn 73 nemetken. Ar mevel-poliser a oa bet kaset eno a vez klevet oc'h ober e rentañ-kont er pajennoù 83 ha 84. Er bajenn 89 en em gav ar gomiserez e Skol-Veur Brest... Betek ar bajenn 102. Hag ar romant ac'h a eus ar bajenn 3 betek ar bajenn 127... Kaoz a vez eta eus Skol-Veur Brest e $2 + 13 = 15$ pajenn diwar ar 124 fajenn zo el levr... M'eo kempoell skrid SC, ne vezer en riskl d'en em gavet gant *private jokes* merket gant SC nemet e 15 pajenn a-ziwar 124 !... D'ober petra ac'h a SC da glemm kement-se neuze, ken ez a un drederenn eus e bennadig-kinnig (9 linenn a-ziwar 28) gant afer ar *private jokes* !

Un drederenn eus ar pennadig ac'h a gant rebechoù diabeg... Met gwashoc'h zo c'hoazh er pennadig-se, diouzh ma soñj !

Un den hag a skriv ur pennad burutellañ diwar-benn ul levr a c'hall kaout e soñj ha displegañ naoñ – gant m'eo diazezet mat. Met lavaret a ra ar pezh a soñj ha lavaret a ra sklaer ez eo e soñj daoñ...

Met, amañ, neblec'h e oa bet skrivet gant SC ez eo e soñj daoñ ez eus re a *private jokes* !... Nann n'eo ket eñ, met an dud, « lod » !... Hag ar gwashañ rebech, « Fent Yann Gerven eo hag hep mar ebet e plijo ar romant-polis-mañ d'ar re a zo tik c'hoazh gant e skridoù », n'eo ket « lod » an taol-mañ, met ur wirionezenn embannet evel un dra anavezet, digemeret gant an holl, evel un dra prouet gant ur studiaden skiantel bennaket : ar re a blij dê skridoù YG zo nebeutoc'h-nebeutañ deuzonte (« ar re zo tik c'hoazh gant e skridoù »)... Ma vefen didruez e c'houlennfen : daoust hag-eñ n'eo ket se doareoù tud dizonest, laosk a-walc'h, hag a 'n em guzh a-dreñv da « lod », a-dreñv d'« ur vrud » ha n'eo gwiriet nemet gant ar mod asur-tre ma komzer deuzonti ?...

Setu ar pezh a c'hallaoñ lavaret diwar-benn ar pezh a zo bet skrivet gant SC. Ur ger a lavar ar diwar-bouez un dra all ha n'eus ket bet rannet griki diwar-e-benn gant Stefan : ar brezhoneg a zeu gant Yann Gerven...

Rak gwevn, soupl, brav eo e vrezhoneg ! Diflukañ a ra sklaer ha lirzhin evel an dour sin eus an eienenn... Ha digeriñ a ra an nor d'ur bed all : bed ar brezhoneg a veze gwechall gant an holl dud ! Met gant an holl ardivinkoù modern a-vremañ...

Hag aze ema kazi-sur andon ar from, ar santimant en devoa degaset ar marsoñj a *private jokes* da Stefan... Skleur ur bed ha n'eo ket bet anavezet gant tud zo hag a zirenk anezhe... a zo start dezhe blazata naoñ da vat d'an taol kentañ evel-just...

E-serr en em soñjal, pa oan o klask sevel an tamm skridig-mañ, e oan bet o prederiañ war heñveliezh ha disheñveliezh a zo etre ar pennadigoù-kinnig ul levr hag ur gwir skridvarn...

Pa skriv unan ur pennad diwar-benn ul levr en devez alies c'hoant da lavaret e soñj... Gant gwir abeg evel-just... Met pa vez lavaret e soñj daoñ, eo dav dezhañ lavaret eo e soñj daoñ ema o tispakañ ha pas en em guzhat a-dreñv d'ur wirionezenn diazezet sañset hag anavezet sañset gant an holl... Dav daoñ arguzenniñ ha diazezañ e soñj ivez evel-just... Traoù hag a zo start-tre d'ober pa saver ur pennadig-kinnig hag a rank bezañ ur pennadig berr... Diskouez an tamm interest a seblant dezhañ bezañ el levr-mañ-levr evel ma ra Stefan brav-tre evit levrioù Malou evit ar vugale, ya... Met amjestr eo klask ober brasoc'h burutelladenn... Dav e vefe sevel ur pennad skridvarn da vat ma faot d'an den evit ober kement-se...

Ra gendalc'ho Stefan da sevel pennadigoù-kinnig daoust d'ar vicher bezañ start... Ah ! Ma c'hallfe an holl lennerien bezañ doujus ouzh an dud a-youl vat a vez o fardañ *Al Liamm* ha pas bezañ ken pismiger ha Youenn ar Gag !... »

Stefan Carpentier : respont da Youenn ar Gag

« Ho trugarekaat a ran evit daou dra, da gentañ bezañ ul lenner feal da Yann Gerven ; gant difennerien evel doc'h n'en do ket da skuizhañ gant ar re a skourjezo anezhañ. Da eil evit bezañ lennet ma skridig er rumm *Petra Nevez* ?. Kerkoulz lavaret ar wirionez

deoc'h, ur mare zo bet e vijen bet hegaset gant ho flemmadennoù. Ret eo krediñ ez eo kaletoc'h kostez ma fenn bremañ avat.

Bezomp sklaer avat : neblec'h n'eo bet skrivet ganin ec'h on ur skridvarner meur, na kennebeut all e vefe AR wirionez ganin. Ma fennadoù zo da gemer evit ar pezh ez int : pennadoù berr gant ma soñjoù lenner. Na mui na maez.

Ne gomprenit ket perak e lavaran ez eo savet an itrik war ur *private joke*. Mat. Pet brezhoneger a oar penaos emañ kont etre ar skolioù-meur, tabutoù ar reizhskrivadurioù ?... Ne 'm eus skrivet neblec'h e oa "kalz" a *brivate jokes*. Evit a sell ouzh an traoù all a ranker kaout un tamm deskadurezh evit o c'hompren ez eo un afer all.

Diwar-benn fent Yann Gerven, n'eo ket abalamour ma ne (vous)c'hoarzhan ket nemeur gant e zoare fent e c'hoarzhan dre ret gant « bidennoù FR1 pe Antenne 2 » (TF1 ha France 2 a ranker lenn, moarvat).

Displijet oc'h bet kalz gant ma foz « ar re zo tik c'hoazh », petra a fell deoc'h, pep hini a c'hall skuizhañ gant ne vern pe skrivagner, ha meur e ve. Kemeromp ur skrivagner e vourren lenn e levrioù, Stephen King. Ur mare zo bet em eus kavet ec'h astomme re e vennozhioù. Ar santimant am boa lenn ar memes levr dalc'hmat. Koulskoude e chom tud hag a zo sot gant kement tra a skriv. N'eo ket kuzhat a ran eta met reiñ da c'houzout e c'hall tud all soñjal en un doare all. Ha ret eo deoc'h gouzout ne roan gwech ebet ul loaiaidig mel evit skourjezañ aesoc'h da heul. Ne 'm eus ket ezhomm da zisammañ ma c'houstiañs evel-se. *Diskrap e Skrabayar* zo ul levr skañv, n'eus ket danvez ur bennoberenn ennañ. Dizonest e vefe klask lakaat krediñ ar c'hontrol. Ur romant polis eo a vez kavet kantadoù seurt-se.

Perak ne 'm eus lavaret netra diwar-benn brezhoneg saourus Y. G. ? Poazh on gant ar pennadoù-skrid diwar-benn levrioù ma lakaer talvoudegezh ar yezh er penn-kentañ, evel pa vefe trawalc'h evit mont da lenn ul levr. Ha n'eo ket brud Y. G. da ober ken war ar poent-se.

Dirollet on da c'hoarzhin gant ho flemmadenn : « Hag aze ema kazi-sur andon ar from, ar santimant en devoa degaset ar marsoñj a

private jokes da Stefan... Skleur ur bed ha n'eo ket bet anavezet gant tud zo hag a zirenk anezhe... a zo start dezhe blazata naoñ da vat d'an taol kentañ evel-just... ». Lakaat soñjoù seurt-se da vezañ re un den ha ne anavezit tamm ebet zo ouzhpenn mont re bell ganti, diskouez a ra bezañ ur seurt eriunell, hini an dud (yaouank ?) gant o brezhoneg chimik hag a spont gant ar “gwir vrezhoneg”. Evit reiñ deoc'h ur skouer eus un danevell a gavan diazezet war ur *private joke*, memes mod : *La Manita* gant Gwendal Denez (*Al Liamm* niv. 415, p.17). Pet brezhoneger a gompren da vat skridoù evel-se ? Ar c'hemm zo etre Gwendal Denez ha Yann Gerven, evidon-me, lenner, eo e (vous)c'hoarzhan gant skridoù G. D. pa ne ran ket gant re Y. G. Pec'hed eo ?

Bezit dichal, Youenn, delc'her a rin da sevel pennadoù kinnig en *Al Liamm* (hag e lec'h all) dre m'eo bet goulennet diganin ober. Kalonek a-walc'h am eus kavet skipailh *Al Liamm* ouzh ma lezel da skrivañ ma soñj diwar-benn al levrioù embannet gante e pajennoù o c'helaouenn, pismiger daonet ma 'z on. Gouzout a ran ervat e fuloro tud all, skrivagnerien pe lennerien, e-giz-se emañ.

Ra gendalc'ho ivez tud eveldoc'h da zont da glemm rak aze emañ yec'hed al lennegezh ivez. Ha goude ma n'emaon ket a-du gant ul lodenn eus ar pezh hoc'h eus skrivet diwar-benn ma fennad em eus kavet mat ho pefe kemeret amzer evit arguzenniñ ha diskouez e petra ne oac'h ket ali ganin. »

Diwar-benn lizher Aneirin Karadog e niverenn 418 Al Liamm, gant Riwanon Kervella

« Gourc'hemmennoù kalonek da Aneirin Karadog tapet gantañ Kador ar Barzh ar bloaz-mañ e Eisteddfod Ynys Môn.

Dedennus ha fromus eo bet evidon lenn al lizher en deus kaset da T. H. pa 'z eus anv ennañ eus ma breur Erwan hag eus familh Dic Jones.

Anavezet em eus an tiegezh-se ha bet on bet meur a wech betek o zi e Hendre, un ti feurm e Blaennannech, met n'on ket bet eno o chom en un eskemm gant ar familh.

Yann Erwan ar C'horr eo, a oa o klask ul lec'h e Kembre e 1970 evit labourat en eskemm d'al lojañ ha d'ar boued a zo bet du-hont daou vloaz diouzh renk. Anv Cynog Dafis eus Talgareg a oa bet roet dezhañ hag eñ eo a gasas anezhañ etrezek ti Dic Jones. Eno e chomas e-pad tri miz e 1970 ha tri miz all e 1971. »

GOUEL AL LEVRIOÙ E KARAEZ

Kant vloaz zo e oa bet Emsavadeg Pask e Dulenn (*Easter Rising*) ha Gouel al levrioù e Breizh ne c'helle ket c'hwitañ war an degouezh-se evit enoriñ ar stourmerien a oa marvet evit dieubiñ Iwerzhon diouzh beli Bro-Saoz. Dodenn ar Festival er bloaz-mañ a oa : levezon Iwerzhon e Breizh.

Ar vro geltiek nemeti bet tapet he frankiz ganti. Taldir Jaffrennou, Frañsez Vallée a oa bet e-touez ar re gentañ o vont da Zulenn e 1901. Ur bern reoù all a oa bet goude-se, Polig Montjarret en o zouez. Liammoù start ha padus a zo etre Breizh hag Iwerzhon : ur bern kêriadennoù e Breizh hag en Iwerzhon a zo bet gevellet, e 1978 e oa bet aozet an dreizhadenn gentañ etre Rosko ha Corcaigh gant ar *Brittany Ferries*, e 2004 e oa bet krouet ar gevredigezh *Breizh-Eire* (ur pennad-kaoz gant Josselin Le Gall, prezidant ar gevredigezh a c'heller lenn el levrig bet embannet war katalog Gouel al levrioù).

Deuet e oa Geraldine Byrne Nason, kannadez Iwerzhon e Bro-C'hall hag e Monaco evit digoradur Gouel al Levrioù e Breizh e Karaez. Ar brezidantez a enor a oa Aziliz Gouez, *chief speechwriter* Prezidant Republik Iwerzhon Michael D. Higgins. E-touez an Iwerzhoniz bet pedet e oa Ciaran Collins (skrivagner saozneger), Eamon O Ciosain ha Tadhg Dhonnagain, brezhonegerien ampart o-daou.

Evit an degouezh e oa bet aozet ur c'hollok gant Yann Bevant ha Gwendal Denez (Skol-veur Roazhon 2) ha gant *Eire-Breizh* : 1916-2016 : Levezon Bro-Iwerzhon.

Dedennus-bras eo bet prezegenn Aziliz Gouez “pluenn” Prezidant Iwerzhon Michael D. Higgins (ganet e Luimneach e 1941, bet kelenner e Skol-veur Gaillimh (Galway), maer Gaillimh ha dreist-holl skrivagner iwerzhonek ha barzh). Lakaet he deus war-wel perzh ar Prezidant evit lidoù da geñver kantvet deiz-ha-bloaz an Dispac’h. Lakaet war-wel ivez e brezennoù diwar-benn roll ar merc’hed en Dispac’h n’eo ket bet morse displeget na lakaet en a-raok.

Prezegenn Eamon O Ciosain, kelenner e SV Maigh Nuad (Maynooth) – bet lennour iwerzhonek e SV Roazhon 2 er bloavezhioù 80 – a oa diwar-benn ar pennadoù bet skrivet e brezhoneg liammet gant an Dispac’h-se.

Alan Kloareg en deus roet ur bern titouroù hag e-leizh a fedoù dianav (ha dispennet ivez un toulladig “mojennoù”) diwar-benn Louis “Napoleon” Le Roux (Loeiz ar Rouz) bet (e-mesk traoù all) sekretour ar Skosad Ramsay Mc Donald (kentañ politikour Labour o c’hounit 10 Downing Street !).

Gouestlet eo bet ar Sadorn da brezennoù troet muioc’h war ar sevenadur gant en etno-muzikour Yves Defrance pe Tangi Fulup, da skouer.

En holl eo bet heuliet ar c’hollok gant un 60 bennak a dud. Embannet e vo ar brezennoù.

(trugarez da Wendal Denez evit an titouroù)

D’ar Sadorn 29 d’abardaez e oa bet roet Priz Kêr Garaez evit ar romant e galleg da z-Daniel Cario (*Les Chemins creux de Saint-Fiacre*, emb. *Presses de la Cité*), priz an danevell e brezhoneg a oa aet gant Paskal an Intañv evit un danevell embannet war niverenn 416 *Al Liamm* (*E dorn Doue emamp*) ha Priz Langleiz a oa bet roet da gKristian Braz evit an dastumad danevelloù : *Rebetiko hag istorioù all* bet embannet gant *Al Liamm*.

D’ar Sul d’abardaez e oa bet kinniget al load nevez, *Lenn*, gant Lena Louarn ha Christian Ryo, rener *Livres et Lecture en Bretagne* ha goude-se e oa bet un diviz war al labour treiñ eus ur yezh d’eben. Tadhg Dhonnagain, embanner levrioù evit ar vugale, en doa displeget penaos e rae evit brudañ e levrioù ha dreist-holl gwerzhañ

anezho d'ar broioù estren (Sina, Korea da skouer). Lakaet en doa lod e saozneg ha moullet un hanter-kant bennak, kement-se evit o c'hinnig e festival al levrioù e Frankfurt pe en Italia ha berzh en doa graet.

DEVRI

D'ar Sadorn 29 a viz Here diwezhañ, e Karaez, da geñver Gouel al Levrioù, ez eus bet dalc'het un emvod gant kenlabourerien voas *Devri*. Abaoe disparti Martial Ménard eo aet al load *Devri* dindan Kuzul ar Brezhoneg, hag al labour zo renet hiviziken gant Herve Bihan (Skol-Veur Roazhon 2) ha Divi gKervella, ha kement-mañ diwar e c'houlenn. Unan eus an trevelloù kentañ eo adlenn al labour a-benn diskoachañ ar vioù-koukoug hag an nebeud kudennoù mont en-dro zo gant al load. N'eo ket bet adnevezet ar geriadur abaoe an nevezamzer ha kresket a-galz eo bet an niver a benngerioù (ouzhpenn 60 000 a oa bete vremañ) : Martial Ménard en devoa labouret a-zevri betek ar penn hag al labour-se a ranko bezañ lakaet enlinenn.

Sede e vo lakaet enlinenn ar geriadur en e stumm adnevezet a-benn penn-kentañ miz Genver 2017.

Ur chomlec'h a vo kinniget neuze d'an dud a fello dezhe kenlabourat ha kemer perzh er raktres.

Heuliet e vo ar pezh a oa bet raktreset gant Martial Ménard : derc'hel da labourat war ar geriadur treadegel, d'e voueta, etc. Lakaet e vo enlinenn ivez ur geriadur an troiennoù (ul labour peuzechu).

www.devri.bzh

AN TAOL KALON ER C'HASTELL-NEVEZ

D'ar Sadorn 12 a viz Du e oa bet aozet *An taol kalon* er C'hastell-Nevez e sal Penn-ar-Pont. Er bloaz-mañ e oa bet enoret ar barzh, skrivagner ha kaner Bernez Tangi. Deuet e oa un toullad barzhed ha mignoned dezhañ da zibunañ barzhonegoù dirak ar saliad leun a dud. N'eo ket alies e vez kinniget seurt lennadennoù e brezhoneg hag un eur-pad e oa bet tro da selaou barzhed : Yann Varc'h Thorel, Mai Ewen, Koulizh Kedez, Fañchig Gwenn, Tudual Huon, Herve Maheo, Lan Tangi ha Bernez evel-just. Branwell Tangi, merc'h Bernez, a oa bet o seniñ telenn ivez ha gwall ampart ar plac'h yaouank. Ouzh ar voger e oa bet staget livadurioù bet graet gant Denez Abernot.

Ur pred a oa oa bet gant ouzhpenn daou c'hant kouviad ha fest-noz bras goude-se.



Bernezh Tangi er C'hastell-Nevez

KLIP DA SELLET

Savet ez eus bet ur c'hlip fentus, yac'h ha buhezek gant ar strollad sonerezh *Tri O' Divi* en-dro d'ur sonenn e brezhoneg (gwenedeg) : *Diaoul me ho kar*. Lena Le Foll eo ar ganerez, Tom Habif a son gant an dreujenn-gaol hag Ewan le Bideau-Canévet

gant boest an diaoul. Startijenn ha levenez e-leizh. Da sellet war *Youtube*.

GOUEL MEUR AR BREZHONEG _____

D'an 19 hag 20 a viz Mae 2017 e vo roet lañs en-dro da Ouel ar brezhoneg e Langoned. Aozet e vo ivez an Taol Lañs war ar memes tro. Aozet e vo ar gouel gant *Mignoned ar brezhoneg*.

www.mignoned.bzh/lizher

RAKTRES KUZUL DEPARTAMANT PENN-AR-BED WAR AR YEZH _

E Plonevez-ar-Faou e oa bet un emvod kelaouiñ d'an 30 a viz Gwengolo ha d'an 2 a viz Here e oa bet votet ar raktres diorren implij ar brezhoneg evit ma vije tamm-ha-tamm yezh ar pemdez. Dav eo treuzkas ar yezh, ober ganti bemdez ha heuliañ pizh an doare ma vo kaset ar raktres da benn. Dav 'vo daougementiñ niver ar skolidi er skolioù kentañ derez divyezhek evit 2022, kreskiñ niver ar pannelloù-hent divyezhek, strivañ war ar c'helenn ha gwelaat sell an dud war ar brezhoneg.

Ne vo ket gwelet brezhoneg skrivet gant lizherennoù stouet ken war ar pannelloù hent, lod eus ar pannelloù avat ne vint ket divyezhek (pa vez labourioù war an hent, kelaouiñ ar vleinerien pa ranker gorrekaat da skouer...).

ISTOR AN TRELIOÙ E BREIZH _____

Abaoe an 20 a viz Here e c'heller gwelet un diskouezadeg a gont istor an trenioù e Breizh. Savet eo bet gant *Mirdi Breizh* er Maezioù Frank e Roazhon. Dedennus eo gwelet ne oa ket bet soñjet

sevel ur rouedad linennoù tren e Breizh gant ar Stad c'hall peogwir ne oa ket a labouradegoù bras er vro. Ur rouedad fonnus a linennoù bihan a oa bet diorroet e Breizh da c'houde, un dra gaer evit liammañ etrezo takadoù Norzh, Su ha Kreiz. Siwazh al linennoù treuz-se a zo bet serret ha diskaret an holl anezho pe dost hirie an deiz.

Gellet a reer goulenn heñchadennoù e brezhoneg ouzhpenn ar re a vez aozet d'ar Meurzh, ur wech ar miz. Kaset e vezont en-dro gant Paskal Nignol.

Diskouezadeg digor betek ar 27/08/2017. Mont e darempred gant : www.musee-bretagne.fr

Miz Du, MIZVEZH AN TEULFILMOÙ _____

Gant *Daoulagad Breizh* e vez aozet un droiad teulfilmoù, bep bloaz e miz Du. E brezhoneg, ar bloaz-mañ, e c'heller gwelet 4 zeulfilm : *Erwan Ropars, hêrezh ur Bazhvalan* gant Youenn Chapalan, *Haiku, en un tenn-alan, ar bed* ha *Paotred al Loc'h* gant Ronan Hirrien, *Ar gwim* gant Soazig Daniellou. Bewech e teu ar sevenerien da eskemm gant ar sellerien.

*Evit gouzout hiroc'h : www.daoulagad-breizh.org
ha www.moisdudoc.com*

BRETON USUEL WAR LEXILOGOS _____

Ar *Breton Usuel*, bet skrivet get Loeiz Herrieu gwerso bremañ, hag embannet get *Dihunamb*, a zo e levraoueg unanennoù en ho mesk. Neoazh, lod kaer ac'hanoc'h n'o deus nemet klevet komz anezhoñ, peotramant e vo memp ar wezh kentañ dezhe klevet komz anezhoñ hiniv.

N'eo ket ker bras-se ar levr-mañ, n'eus ket ur stumm modern dezhoñ ha traoù zo en hor buhez a-vremañ n'eus ket anezhe ennoñ,

forset mat, mes e-leizh a draoù a gaver a-barzh ur sort, ha peadra da bep unan da wellaat e live brezhoneg, peotramant evit lod da lakaat muioc'h a liv a Vro-Gwened àr o brezhoneg.

Er skanet em eus nevez zo, ha bremañ e c'heller er c'havout àr *Lexilogos* ! Er pellgargiñ a c'heller gober ivez.

www.lexilogos.com/breton_dictionnaire.htm

P. Drean

LA HULOTTE _____

Kaset eo bet d'*Al Liamm* niverenn 104 *La Hulotte*, ur gelaouenn a-zivout al loened, ar gwez hag ar bleunioù n'heller kavout nag el levrديوù nag er stalioù kelaouennoù. Sirius ha fentus war un dro eo. Ur bern tresadennoù a gaver enni ha pedagogel-tre eo ar stumm da ginnig an traoù. Anvet eo an niverenn-mañ *La caverne du père Chabot* ha kontañ a ra deomp doareoù ar penndog, ur pesk a vev kuzhet er rinieroù...

Koumanant evit 6 niverenn : 29€

La Hulotte - 8 rue de l'Eglise - 08240 Boulton-aux-Bois

Pgz : 03.24.30.01.30

www.lahulotte.fr